

- 41 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

## 99. JULIANIK

( follennoù 32-33 ha 35. Ar follenn 34 a zo  
deroù Ar Godisserez )

Julianik an den vaillant  
a lignez nobl ag excellent

a zo ed eun devez eb lakad mar  
Der c'hoad en avis chasseal?

ebars ar c'hoad pa ze entreet  
eul loenik rouz en deus rankontret  
ag eur pel bras e deus hi euliet.

- Na da petra em euliez-me  
nemet en esper kacout va buhe.

Ma nam lazet, te a lazo  
ta van a ta dad var eun dro.

- possubl e ve, ve ar c'hrouadur  
a ve doc'h e dad ken dinatur  
ar poan zo bed deus e vezur !

Me kuitefe kentoc'h ar vro-man  
ken na konsantfen o lezan

Julianik en deus kuitet  
e mez ar vro e zeo ed  
eur c'hastel kaer e erruet

pa voa ed eur penad mad  
E ti eur prinç a neum kavas  
Pini e c'harie  
keit a peb hini e bugale.

Pa e bed enon eur pel bras  
Komz e demizi a deuas  
Da eun demezel a ti bras.

Setu i demezet o daou  
a roët dezo en er-goulou  
eur c'hastel gaer deze o daou

- 42 -

Tour he illis var he leve  
kabiten he pen he arme.

Setu an dimezel sortiet  
Dan offern eo e he ed.

gant an hent pa voe o vonet  
Daou zen ancien en deus rankontret.

- Daou zen ancien, din leverit  
Na pelec'h e teuit na ma zit.

- Ni a zo daou zen glac'haret  
Ma zo bed biskoas var ar bed

O klasq eur mob o boa zo dianket  
Julianik e zeo anvet.

- Diskenit, daou zen ancien, a deut en ti  
Me a roio decc'h o tijuni  
Na ven pelec'h e man e ti.

Ed eo en eun tamik affer  
Ne dalleo ket ne deuo dar ger.

Kement a joa en devoa oute  
Ma deus hi lakaet  
ma lakas anezo /o daou/ en he goele  
a mond dan offern /adare/ goude se.

Julian er ger zo arruet  
eur sell er goele en n'eus<sup>o</sup> gret ° a-us :  
eveus

a ma chonje dean incontinent  
e voa gant e greg eun den mechant

tena e pognard deus e gostez  
ag o laza o daou assemblez  
a mond var ar ru da valle.

gant ar ru pa voa e vonet  
he bried an deus rencontret ° a-us : gantan  
zo erruet

- Ma vriet, dine leveret  
Petra an daou zen zont o heus lojet.

- 43 -

- O tad ag o mam, Julian,  
a voa en irvoud ag en poan,

e voa dre ar vro e valle  
e klasq klevet o toare.

- Itron Varia ar vur viniget  
Kons ar c'harc zo arruet,

en devoa dine lavaret mad  
e lac'h(j)en va mam a va zad.

En tu all dar rivier Jourdren  
eus plass d'ober pinijen

- Mar did, ma fried, me iel ive  
pa he ordrenet gant Doue  
an eil bried euill e guile.

Enon o deveus kunduet  
Eur vuez santel a parfet  
breman e meint er joustet.

e pedi Doue deiz a noz  
evid ma himp oll d'ar baradoz.

vvvvvv

Jannton Charlès, 10 fevr. 1851

vvvvvvvvvvvv